

**Coanta plac'hik zo en Treguer  
eo Iliedik ar barazer.**

**Pa gerin me me iel de zi  
Ne garan nikun keit ag hi**

**Ar mest bernard a lavare  
De bostillon eun dei's a voë :**

**Va fostillon va fot a di  
Qe gant liser petek henri**

**Ke gant liser petek va far  
Goëz diouti petra lavar.**

— Bonjour iliedic ar barazer  
A deoc'h postillon pa doc'h en ker

— eur zivezadic oc'h deuet  
Diziou genta man va euret

bis  
lavarit dezan dond d'am goëlet

**Chencharmant zo ebars el liser  
Drebi o bouet a mond d'ar ger**

— Ma fostillon din leveret  
Petare respont a heus bed

**Chencharmant zo ebars al liser  
Drebi va bouet a dond d'ar ger.**

**Diziou genta man e euret  
Lavaret deus deoc'h mond d he goëlet.**

— Va fostillon va fod a ti  
ten din va marc'h a merchossi

ten din va marc'h a dib én din  
 Ma zin d he voëlet pa lavar din.

— Dibonjour liedic ar barazer  
 A deoc'h mest bernard pa moc'h er ger.

Re zivezadic a zeoc'h deuet  
 Diziou genta man va euret.

Chwi o poa dime prometet  
 Pa deuchen er vro va chemeret

Ma prometis deoc'h ag a ris  
 passeal diouzoc'h a c'hoantis

passeal diouzoc'h a moa gred  
 Ober goap a innocentet

Mer goar avad iliedic  
 Oc'h a lignez nobl a pinvidic

Vid beza ho preur dichentil  
 A deuz he gostez kleze dir

bis  
 O c'heur skoët e deus me meus mil

Ag a ven me mab da eur belek  
 A trugare Doue n'en daon ket

Guinidic on deus ar c'hanton  
 A lignez nobl tud a fesson.

Me a meus eur maner er Vourdel  
 Ag a zo varnan trivarc'h tourel.

Na neus prenestr var dro dam zi  
 Na meus moïen do allaouri

Ag o harre tout e fons ar mor,  
 A chomet gant va mam e henor.

Me a meus trivarc'h habid rus scarled  
 A kement al a rus pourpret

Ag o roffe tout kuit eb eur pes  
 D'an ini am graë irio intanvez

Liedic na lavarit ked mad  
 Iliedic mirit o tillad

Me a reï do tous eul louzaouen  
 A lakeï e ouazied da asten

en nan doue, mest bernard na roit ket  
 Din ve ar vez deoc'h ar pec'het  
 bis  
 lac'ha eun den iaouank noz e heuret.

Catou Bouder, 22 sept. 1852.

*La chanson est sans doute inachevée,  
 dit M. P. Le Roux, à la fin de sa publication.*

*Il n'y a pas de titre dans le ms. M. Pierre Le Roux a publié cette pièce sous le titre : Iliedik ar Barazer. (Annales de Bretagne, novembre 1898, p. 60-64)*